

# CHANSON NEVEZ

*Var sujet an everezel.*

Breman pa hon dizourci, ha caout eun tam amzer,  
Eman echuet an east ha laquet er sollier,  
Eman deut barz ma speret na gompozi eur son,  
War sujet ar graguez ha demeurez ar c'hanton.

Ewar sujet ar graguez, hac ar merc'het yaouanc,  
Pere a zo accoutumet da ewa gwin-ardant,  
Da ewa cafe ha gwin-gwen, ha tassadou gwin-ru,  
Odivi, cognac ha liqueur hac ive cafe du.

Mez eur wreg accoutumet da eva odivi,  
Obliget a vo he goaz da zival deuz onti,  
Da divoal onti alc'houez ar prez pehini man an arc'hant,  
Evit empech anezi da gaout pa no choant.

Mez eur wreg en deuz adrez hac a rayou troyeu,  
Ha ray eun tol lagat da goz, ha netra na vouïou,  
En peb mare deuz ar zun he tigueuz ar miliner  
Dre eun devez mad he zoc'h deut ne man quet Yan er guer.

Neuze e pignont bars er gamp, da gargan eur sahat,  
Mar plich ganec'h miliner en cass din d'ar marchat  
Mez mo avertis miliner ha rog ha hefet deuz ma zi,  
Da non pa laret guir ha leet ha ewo odivi

Breman e vo cavet an tu da gaout eun tam arc'hant,  
Ha pa vo cavet ar gomer e vezo gwin-ardant,  
De bonjour deoc'h ma hommer pel zo meus quet o quelet,  
Dem da glasq pep a vanac'h da dori hon zec'het.

En eur gontan ho doare ezont d'an hostiliri :  
Petra momp ma hommer, coulz he di:np caout odivi.  
Hema digasso grouez dimp ha nerz enn hon izili,  
Me na gavan qet gwel boesson evit an odivi.

Mez dre forç d'an ewan e teuont da vewi  
He commançont pilat ho bec ha da zounet hardi,  
Neuze teui stang ha stang an demi-quart enn dro,  
Digass eta hostis, neq et arc'hant ha vanquo

Deuz quement den eve en ty ho devont consequanç,  
Mez confusion en devo ann dud enn ho fresanç,  
Mes laret e reont en trezo, pa deus guelet ho er,  
A setu ase merc'het, ha so le un ho foufer.

Mez pa vent eru leun havoac'h he teuont war ar ru,  
Mez ne valeent quet plen, branla a reont d'an daou du,  
Unan a lar quenavo poent he dimp mont d'ar guer,  
Mes he benn-hal ha lavar me meuz ma soar d'ober,

Me ha meuz c'hoas da gaout saon, roussin hac holen,  
Hac ar butun zo manquet bars ma zabatieren,  
Antreñn evelse bars eun-ty, da glasq zaou ha roussin,  
Fouillan ha ra he godel, mez arc'hant neuz qet quin,

Mez eur vaouez hardi, pehini deus qet pridiri,  
Ma pa ve achu he arc'hant he c'houlen hea credi ;  
Mez merc'het ar warc'hadourez dibot ne wen ambas,  
Hac a respontas ractal dezi ebars ne faç.

C'houi heuz foetet ho arc'hant barz an hostiliri,  
Ha breman ha peus an er da houlen treou enn credi :  
Dont era er mæs deus an ty, gan eun er coleret,  
Ana ini na ne qet hardi a ve ganti spoutet.

Ober e rei tro ar foar, hep mez, evel-ze,  
Couscoude he renq caout harp barz ma allo bale,  
A nep confusion he bet ha rei tro an dachen,  
Mez en devo hi zud ho welet eur sort strouillen.

Ebarz ma vezo fin d'an de, na guemmer na pen na troad,  
Rac ha bun hi has d'ar gear, vo ret caout eur marc'h mad ;  
Ha pa fell dezi parlant ema deut a bill bras,  
Passeit ar gallec hac ar latin, na war quet davantach.

Brud e ve hoas deuz ar merc'het hac e ha d'ann ewach douc  
Ha ew wealc'h betec mont mew, mez ne reont quet a drouz,  
Ar reze da vianna zo agreaploc'h da welet,  
Rei a reont da gredi a wesen sœurezet.

Ar merc'het yaouanq memuez tra, ebarz eun hostiliri,  
Gwerennou gante bars no dorn ha leun ha odivi,  
Me ha meuz annoudegez war buez ar merc'het,  
Kar bet hon bet, ewechou gante ho lipet.

Monet e ran da zisclerian ebarz en abreg,  
Darn deus ar marvaillou zo c'hoarveet en Guene,  
Me am boa choâzet da vestrez eur plac'h capabl meurbet,  
A ouar poquet da lost ann tas, pa ve ganti carzet

Eun deves he bars ar foar me hem boa hi rencontrèt,  
He bars en hostiliri me am boa hi saludet,  
Salud, bonjour plac'h yaouanc, tensor ma amitie,  
Contantamant ma speret objet ma harantez.

Ha dec'h ive den yaouanc, me ho salud ive,  
Deut da guemer ho lod ar foar, mar he ho polonte,  
Quemerit eur bannac'h liqueur, pe eur bannac'h *la goutte*,  
Quemerit deus ar sort eo ar guelan d'ho cout.

A boë eur pennat amzer hanaveent he zantimant,  
Me laras dezi, ar gwin-ardant zo eun dra excellent,  
Ar bannac'h quenta ha ewas ha rez dioutan min fall,  
Mez hoant he devoa a dare da gaout eun all.

Ha me ho houlen ive pep ha vannac'h d'am zro,  
Me na maquet risq ebet car ma mestrez ha baëo ;  
Ma mestrezic ha blich d'hin, ha dreist aun oll verc'het,  
Biquen enn he hompagnunez me mam bezo sec'het.

Evet a sort a garfo'h emezi ma servicher,  
Me senos e renko em c'hondui d'ar ger :  
Allas neuze he teuis da zoujal em memor, em speret,  
Ha cetu aman eun den hac a zo goal dapet.

Nonobstant da guement-ze partial a vo ret.  
Mez ma na né quet wit querzet, hi douguen ne rin quet.  
Mespa voamp deut barz enn awel, hac avancet barz enn hent,  
Pa zispegen dionti he coeze war ann dachen.

Ar parapluï a zo collet, hac hi zavancher zo a scleg,  
Hac hi houël ha zo chomet a damo bed ann dreiz,  
Cetu clanw bras ar plac'h paour, va guemer na troad, na penn,  
Ha me zo nehet bras gant ma mestres strouillenn.

Ya clanw bras eo mestrez, ne get quin ewit querzet,  
Ret he din hi lezal war an n'hent, ha hi laquet da gousquet,  
Neuse me zeuis d'ar guër hac hi lezas enno,  
Pa hi devo cousquet awalc'h, marteze hi difuno.

Gueiloc'h we d'ar sort merc'het enn plac' ho faraplulou,  
Caout kiri goloet pa hefent d'ar foariou,  
Ha neuze d'ha vianna, ma ne ven quet wit querzet,  
He vefent tolet he bars, hac a vefent chareet.

Ho hass he vefe propoc'h car ne vefen get goelet,  
Ha quit he vefe ho dillat da vezan habimet,  
Ha comotoc'h eo ive d'ar re-ve deus o ren,  
Car pignal ebars ar har n'euz quet quement a boan.

Ho pidi ha ran merc'het dre ma zond'och mignon ;  
Da vezan moderet pa ewet boesson ;  
Car enn eur ewan re, a offancer Doué,  
Distrujan a ret ho corf, ha lahan ho ine,

Evidon me d'ho quelen me zo ive bambocher,  
Demeus ha barez Gourin, hac he chom er *Kerguicher*.  
Me a zo eur paour qez den, gant ann ewach dibochet,  
Mez ret ew d'hin lezel ma renq er bla-man gant ar merchet  
Hac eur vicher fall ew ive evit destum madou,  
Ret he din mont er bla-man da varc'hadour coëffou,  
Entre ar pez a vo uzet hac ar pez a vo roguet,  
Mar teze he teui ha ben, da honnit ma zam boet.



## MARI BEG A ROG HA FRI PARTOUT

Var ton : *Son an dançou.*

Mar oc'h eus c'hoant, va mignonet, d'a anveout eur vreg rog,  
Me a kundo pa guerfet, dirag Mari beg a rog,  
Bemde var dro euv heur anter e cluc'h var treujou e dor,  
Kerkent teodou pig ar c'hartier gant eur skauu pe eur gador,  
A zireñ oll eze e c'hever, an audianç so digor.

Var balen Mari e veler eur pes fouldren assied,  
Var bini e cont e kommer kement e deus inventet;  
Klévet a rér pet den lipous a ya bremde d'ar c'hafe,  
Pet plac'h e deus tri amoureux, ha pet a zo stad enne:  
Pet ozac'h a zo mewier, ha pet a bill o grague,

Mari beg arog o gommand var ar c'honsel divragou,  
Eb kaout an nebeuta damant e tigor frank e guenou,  
Pa ne deveus var e bizach na moustachou na baro  
E red déi kaout an avantaj da zikrial tud ar-vro;  
Guévier, sotoni, kos langach, flud a peb kalite zo.

Mari beg arog eo titret vel an huella noblanç,  
Dommaj é n'en d'é ket priet d'eun den pinvidik a Franç;  
I é princes an diezi, comtes al liboudennou;  
I é dukes al loustoni, marquises ar strakellou,  
Gouarneres ar jolori, baronez ar pillou.

Kerkent a mave imbannet daou den yaouank da zimi,  
Eve, d'ai lun vintin, galvet e c'honsel bras gant Mari:  
Ped konseiller en gueleden a boaga gant e vouton bér  
Evit klask ar guellan moyen da derri pront an affer;  
Ar plac'h a gar aq jigoden, pe ar goas a ve mévier.

Ar re voassa da zikrial an tud a ya en fortun  
A zo. evit an ordinal, merc'hed chommet eb nikun;  
Merc'hed kes chommet da goza eb tapout eun tamik goas.  
Hac a gommanç bréma facha, dre ma ne deu den d'o choas.  
Couskoude an ini gossa n'é ket tri-uguent vloa c'hoas.

Kekent ha me vel eun eured o tont varzu an Ilis  
Mari beg arog a zired en manchou lous e invis;  
Evel eur vioc'h ho vreskin e c'haloup abiou ar ru;  
Holà! Catel, Jeannet, Perrin, Soas, Mac'havid, deut dious-tu,  
Cetu aman eured Martin, deut da dremen ar révu.

Va c'hommer sellit eus hounes, dislivet e davancher  
E c'horneten zo eb ampes, hag e gueleden re vér;  
Ho! sellit-ta eus an den-man, peguen striz é e vragou.  
E dog so brassoc'h evitan; ha kals re hir e voutou,  
Eur chimizeten so gantan var a rochet en pillou!

Pa ve eur vreg kes gouilloudet, divar e buguel kental,  
E c'houlén Mari estonet: petra, nao mis so dija?  
Me gave din voa an eured d'al lun goude pardon Pól,  
Ha Pask n'é ket c'hoas erruet, allon! gréd o deus an tol  
Eb n'o deveus va c'hemennet, an dra ze a gavan drol.

Pa gleô kloc'h Ilis ar barrous o c'hervel d'eur vadiant  
Mari gant eun troad eb botes, a erru arog ar chant;  
Mazs, dre valheur n'eus ket ezom demeus eur voues ken raouliet  
Da zikour Kam Deum evit an néve gamet.  
Gant e c'hommerezet e chom o kichen dor ar véret.